

^{60.}
KANTIK

ITRONN AR ZILVIDIGEZ

Var don : *Ar Galon sacr.*

DISKAN

Truez, Va Doue,
Hor c'heuz zo bras;
Savit ar Frans eb dale
Ken huel a biscoaz. } *bis.*

1.

Dallet oamp oll ha mesvet gant ar pec'het,
Hep aoun na mez e torremp ho lezen.
Ha red vo c'hoas dar gurun ha d'al luc'hed
Diskouez ez euz eur mestr a ziouc'h hor penn ?

2.

Arne du, eur stereden o para
ro kaloun ha nerz d'ar sturier paour;
Sellit en Env... ar c'houmoul a danoa,
Rag savet eo ar verelaouen aour.

3.

Guerelaouen, piou oc'h-hu nemet ar Verc'hez
Zo diskennet var gern hor menesiou;
C'hui eo Mari, Itronn ar zilvidigez
Ha dont a rit ho tourn leun a c'hrasou.

4.

Guerelaouen, c'hui eo ar vam benniget,
Ar vam dener, ar vam madelezuz.
C'hui lavar deomp : « Pedit, ma viot chelaouet,
Ma pardouno kaloun va mab Jesus. »

5.

« Pedit, pedit ha skuillit ive daelou,
Rag me a bed, dour zo em daoulagad ;
Dre ar glac'har goalc'hit piz ho pec'hejou,
N'o pet ket aoun, ho parner eo ho tad. »

6.

O Guerc'hez dous, eienen ann esperans,
Ehars ho treid emaoump oc'h hirvoudi ;
Bro-C'hall e kaonv a zell ouzoc'h gant fizians...
Hor chelaouit, hor sikourit, Mari !

PERMIS D'IMPRIMER :

Quimper, le 22 Octobre 1873.

J. JÉGOU.

Le Gaul. Breton

Brest. — Moullet e ty J. B. Lefournier, hena.